

# KANTIK SANT YAN-VADEZOUR

(Var dôn Kantik Lambader)

## Diskan

Kanomp a-unan, kristenien,  
Gloâr da Zant Yan da virviken ;  
Ha pedomp oll ma teurvezo  
Taoler e vennoz var hor bro. } bis

1

Etouez an dud morse n'euz bel  
En amzer goz anavezet  
Santelloc'h den eget Sant Yan.  
Ervez komz Jezus he-unan.

2

E kreiz ar meaziou o veva,  
Guisket evel an den paourra,  
E c'hortoze, er binijen,  
Silvidigez ar bec'herien.

3

Pa zonas heur an Aviel,  
Diouganet el Levfrou Santel,  
An dezert oll a dregernaz  
Gant mouez pounner ar prophet braz.

4

Bembdez, var ribl-ster ar Jourden,  
E prezege d'ar Juzevien :  
— « Skoit, skoit var ho peultrin,  
« Ema 'n ho touez an Oan divin

5

« Ema 'n ho touez Salver ar bed.  
« Ha c'houi n'hen anavezit ket!  
« Dre nerz glac'har, dre nerz daelou  
« Goalc'hit, goalc'hit ho pec'hejou! »

6

Goude prezeg, an den santel,  
'Vit embann guelloc'h e gentel  
Hag annons ar Zakramanchou,  
A skuilhe dour var ho fennou.

7

Pa deuz Jezus he-unan,  
D'ar ster da c'houlenn badiziant,  
Leun a zoujans, ar Badezour  
Var e benn sakr a skuilhaz dour.

8

Kerkent, setu a-uz dezhan  
Ar goulm zantel, ar Spered-glân;  
Ha mouez an Tad, eur vouez nerzus.  
Oc'h embann: « Va Mab eo, Jezus! »

9

Brema ar Zant a gomzo c'hoaz,  
Ha nerzussoc'h eget biskoaz;  
Mont a rai beteg Herodez.  
D'e c'hourdrouz e kreiz e balez :

10

— « Herodez, te a ro skouer fall!  
— « Te zalc'h ganez pried eun all !  
« Dionall na gouezfe dourn Doue  
« Varnhot ha varnhi eb dale! »

11

Herodez, dall ha digalon,  
A daol ar prophet er prizon;  
Met Sant Yan morse ne davo  
Dirag na prizon, na maro.

12

Setu lein vraz gant Herodez:  
Eur brinsez yaouang, danserez,  
'Vit priz e dansou divergount  
A c'houlenn penn ar zant dispount

13

Dibennet eo ar prizonier!  
— Savit d'an env, prophet-merzer !  
Ho kurunen a dalv eb mar  
Oll blijaduriou an douar!

14

Ha te, Herodez, kren brema  
Rak mall eo d'it, mall eo krena  
Noz-deiz penn Yan te a welo,  
Ha pebeuz kount deiz ar maro!

15

Merzer dispar ha galloudus,  
Deskit deomp oll karet Jezus  
Ha dalc'her mat da virviken  
D'ar Vadiziant 'zo var hor penn.

16

Deskit deomp oll atao tec'het  
Diouz an dizursiou milliget  
A goll ar vro, ar parrezio,  
A goll kement a eneu.

17

Evit ma ouezimp oll gant preder  
Kempenn hon ene d'Hor Zalver  
Pa ziskenno en hor c'halon  
E banket ar gommunion.

18

Grit ma ouezo tud Sant-Thonan  
Kerzet bepred, oll a-unan  
Dre hent striz ar zilvidigez  
Da vro ar zent hag an elez.

Aotre da voulla

12 a viz Eost 1933.

P. JONCOUR,  
pikel bras.

